

Troiad Langristin - Toull ar Ranig

- 1 **Lec'h loc'hañ an droiad.** E kroashent-tro Toull ar Ranig, mont a-zehoù goude ar genoù tan-gwall.
- 2 **Purlec'h :** Mont a ra ar purlec'h en-dro e Toull ar Ranig abaoe 2018. Disaotrañ a ra an dourioù lous a-raok ma vint kaset d'o endro naturel, gouer ar C'haro. Treiñ a ra ar purlec'h hervez ar reoladoù a zo e talvoud e Frañs hag en Europa. Tretañ a ra an dourioù lous evit 11 700 kevatal-annezad (KA), da lavaret eo 4000 m3 bemdez ar c'has nominal.
- 3 **Stêr ar C'haro :** Emañ mammenn ar wazh-mañ e Toull ar Ranig, en argrec'h d'ar purlec'h. Naetaet e vez bep bloaz gant AAPPMA (Kevredigezh kretaet evit ar pesketa ha gwareziñ ar metoù dourel). Treuziñ a ra ar gumun eus ar Reter d'ar C'hornôg betek morlenn ar C'haro, a-raok en em gavout e morlenn Brest. Meur a spesad pesked zo enni, dreist-holl dluzhed Fario, sili, penndoged
- 4 **Lennoù-kannañ Kerdomas ha Lostengoad.** A-raok ma vefe dour-red er c'hêrioù war ar maez e veze darempredet kalz al lennoù-kannañ, hag enno e veze kaozeet ha graet anaoudegezh gant tud all. Pa veze disec'het lenn-gannañ Lostengoad en hañv ez ae an dud da hini Kerdomas
- 6 **Pellaat** un tammig diouzh an hent evit mont da welet ar roc'h douarek hag an « toulloù tud ». Ma pignit e-tro 50 metr war-zu hent beg an Arvorig e weloc'h ur roc'h war-sav, ur peulvan, war an tu kleiz. Karget e vefe ar peulvan-se gant energiezh tellurek degaset gant daskemmoù « diavaez » e magnetegezh an douar ha perzhioù an douar a-fet kas nerzhioù. Dont a rafe ar perzhioù-se diwar ar wazhienn dour a dremen e-tro 9 pe 10 metr dindan ar peulvan. An « toulloù tud », a zo war ar c'hleuzioù un 300 metr bennak ac'hann, a vefe bet toullet hag implijet evel lec'hioù eveshaat e-kerzh an Eil Brezel-bed, hervez testenioù an dud a zo o chom dre eno.
- 7 **Etre Lostengoad ha Langristin** - E plas ar c'hoadeier a weler hiziv an deiz e oa parkoù da lakaat loened da beuriñ, pe da vezañ falc'het e-kerzh an hañv. Ar re a oa heoliet ar gwellañ a veze gounezet sivi warno.
- 8 **E-kichen ar wazh-dour,** treiñ a-gleiz. Mont a reoc'h a-hed ar wazh betek traoñ Langristin.
- 9 **Distok diouzh ar wenodenn,** un 20 metr bennak ac'hano, emañ lenn-gannañ Langristin. Un eil lenn-gannañ zo e-kreiz ar gêriadenn.
- 10 **Erruout e chapel Langristin :** E stumm ur groaz latinat eo ar savadur ; al lodennoù koshañ anezhañ zo eus ar XVIIvet kantved. Meur a zelwenn e maen hag e koad liesliv zo ennañ : Santez Kristin, ur Werc'hez he Mabig Jezuz, Sant Kom, Sant Damian... Lidet e vez ar pardon d'an 3de Sul a viz Gouere. Un dachenn Kilhoù kozh zo nepell diouzh pignon ar mont tre. Evit ar c'hoari kilhoù kozh-se eus ar vro e ranker bezañ ampart ha dornet mat. Bez' ez eus ur peulgae koad 1 metr uhelder en hantergelc'h ha 9 c'hilhenn staliet a-dreñv d'ar c'hoarier. Bannet e vez ur voulenn goad pounner gant kalz a lañs ha resider war ar peulgae, ruilhañ a ra war he c'hiz etrezek ar c'hilhoù. Desket e vez reolennoù ar c'hoari dre gomz a-rumm-da-rumm.



Troiad Langristin - Toull ar Ranig



Kredad : IGN Rando

D'AR BOURMENERIEN Lodennoù zo eus ho troiad a dremen war gwenodennoù prevez, gant emglevioù tremen dre gaer. Chom war an hent balizennet, mar-plij, ha doujañ an obererezhioù micherel a vez war ober. Heuliañ ar balizennoù (tresoù melen). An dud a ya war varc'h-houarn treuz bro (MTB) a rank mont da-heul ar balizennoù-se ivez.



Troiad Langristin - Toull ar Ranig

8 km mont-dont



2e



45 mn

